

# KANAOUEN AN OTRO SANT ELER

Ton : *Potred Loguivy, pe Santez Anna.*

## DISKAN.

*Otro sant Eler binniget,  
Pédet Doue 'vid-omb oll ;  
Mired hon iné a bec'hed  
Hag hon tier a wall-goll.*

Mar 'zo 'néb lec'h hano brudet,  
En Goélo hag en Tréger ;  
Mar 'zo néb lec'h iliz pleustret,  
Eo hoc'h hini, sant Eler.

Skouer vad ann oll gizellerien,  
War ho labour daoubléget,  
Na paouzec'h tamm gand ho péden  
Ha labour gaer 'vée gret.

Eur gador aour 'oe c'hoantaet,  
Eunn dé, gand Roué Bro-C'hall,  
Ha gand an danvé d'hac'h roet,  
'Réjoc'h unan hag eunn all.

Gand eul léalded kër kristen,  
Zouézet braz ar Roué,  
'Touéz hé gentan kuzulierien,  
Ho kémeraz héb dalé.

Nag 'arched aour 'c'h euz kizellet  
D' Eskibien santel ho pro,  
'Rog béan gand ar bobl choazet,  
Evit bout Eskob d'ho tro!

Sant Eler, kizeller dispar,  
Ar c'haeran kizeller aour,  
Sant Eler 'zo war ann douar  
Patron ann houarner paour.

Hag en 'vé kàd er baradoz  
Eur Sand ével sant Eler,  
Eur Sand da skuil gwelloc'h bennoz,  
War loened al labourer?

Nann, en Breiz, n'euz ked er mézio,  
N'euz tiek na houarner,  
Ha na larfé 'nn hé bédénno  
Eur béden da zant Eler.

Ha d'hé iliz, héd ar bla-oll,  
E tiréder da bédî. —  
Sant Eler, mired a wall goll,  
Andud vad a deu 'nn ho ti.

Mired hon loened a glenved,  
Mired a zroug hon c'hézek :  
Liez évit gonid hon boed,  
N'hon deuz némed eur gazek.

Gret ma voint iac'h hag ho fenn zonn,  
Hir ha kaer gant-he ho moué,  
Hag ho po c'hoaz, gand ar pardon,  
Eur gurunen hern névé.

Rag pa réd enn erv ann aler,  
A vé labour er c'hovel,  
Stankoc'h war ann tomm e skoer,  
Gand houarner Breiz-Izel.

Da Fantan ar Sant binniget,  
Hon c'hézeg a deui ato :  
Kared-omb gant-han, Brétoned,  
Ha c'hanaved a bell-zo.

Pa savaz trouz brézel gwéhall,  
Entré Franz hag hon zado,  
Sant Eler, kannad Roué Gall,  
A lakaz peuc'h en diou vro.

Hon c'halono 'zo c'hoaz rannet,  
Sant mad, unaned ann-he :  
Béomb-oll breudeur barz ar béd,  
N'hon deuz 'med eunn Tad enn Ee.

Mar gleskomp ré 'nn hon fédenno,  
Treo ar béd, treo a c'hlac'har,  
Reit d'imb kentan mado 'nn Envo,  
Ha war-n-oll treo ann douar.

Hervé ar brasan léalded,  
Reized hon oll vare'hajo :  
Doué bennoz na rofé ket  
D'an dud a liv falz komjo.

Dalc'het da vibien Breiz-Izel  
Ho fé goz, ar fé nerzuz,  
Hag e'ch éfomb, a denn-askel,  
Eunn dé d'ann Env gand Jézuz.

Ar gristenien péré a gano, enn Eskopti Zan-Briek, ar c'hantik  
man, e stad a c'hras ha gant gwir doujanz Doue, a c'honeo  
bep gwéch eunn induljanz a zaou-ugent dévez.

*Zan-Briek, ar seiz-war-'nn ugent a viz Even, 1876.*

+ AUGUSTIN

Eskop Zan-Briek ha Tréger.